

Geriaoueg:

Bourc'hizelezh (p28): en XVIIIe kantved renkad annezidi ur gêr é pinvidikaat diwar ar c'henwerzh pe diâr trafik an arc'hant

Despot (pennroueed) sklêrijennet: pennroue aotrouniek levezonet get mennozhioù ar Sklêrijenn ha pennreolennoù prederourien ar Sklêrijenn evir kas reformoù (adreizhoù) àr-raok en e vro.

Ekonomiezh an plantadegoù: sistem labour-douar diazezet àr tier-feurm bras a implij sklaved.

Frankizad(idi): sklav bet dieubet get e vestr.

Galloudegezh trevadennel: Stad get tiriadoù aloubet ha renet getañ. Liammoù start e vez etre an drevadenn hag ar bennvro, ar Stad trevadennour.

Indigo: plantenn implijet evit liviñ (e glas) dilhadoù.

Kenwerzh tric'horn: kenwerzh ganet a-dal ar XVIIvet kantved etre Europa, Afrika hag Amerika.

Kontouer (p16) : lec'h-kenwerzh ha porzh d'ober ehanoù

Kotonajoù= Indianezed: lien e kotoñs livet pe moullet.

Kumpagnuniezh kenwerzhel: embregerezh savet get marc'hadourerien evit diorren oberiantizoù kenwerzhel (hini an Indez en Oriant da skouer).

Morianeta (p29) : kenwerzh gwazed ha maouezed eus Afrika, skrapet ha gwerzhet da c'houde da berc'henned sklavelour

Monarkiezh absolut (p36): renad politikel m'emañ an holl c'halloudoù (seveniñ= lakaat e-pleustr a lezennoù; lezenniñ = sevel ha votiñ lezennoù; banel= reiñ ar justis) get ar roue , ar mestr nemetañ eo.

Monarkiezh parlamantel (p36): renad politikel ma'zeo bevennet galloud ar roue get ur vodadenn (pe ur Parlamant)

Marc'hadour= négociant, un den a bren produioù get ur c'hementad bras.

Metropolenn: Stad getañ un drevadenn.

Monopol: chom hep kevezerezh

Morianetaer : den a ra trafikerezh sklaved (galloud a ra bout ivez al lestr).

Paramantour (p29) : den ag a gustum da arc'hantiñ listri kenwerzh hag a bourchas ivez kement tra evit bageal ha leviata(bleniñ= piloter)

Prederour (p36): en XVIII e kantved un den hag a glask kompren ar bed dre ar poell (rezon)

Produ manufakturet: produ savet e-barzh ur manufaktur (uzin).

Sañsur : difenn groñs get ar Stad bout embannet

Sklêrijenn (p36): luskad-soñjal an XVIIIe kantved a oa ennañ gouizieien ha prederourien a

Sklav: den kollet getañ pep frankiz, perc'hennet ma'z eo get ur mestr pe ur Stad.

fellet dezhe kas an denelezh àr hent an eürusted hag an araokaaat.

Torridigezh ar sklaverezh: den pe pennad evit difenn groñs ar sklaverezh (abolitionnisme).

Trevadenn (p16): tachenn douar aloubet , mestroniet ha gounezet get ur vro estren

Trafikerezh treuzatlantel: kenwerzh ha dezougen sklaved du a Afrika betek Amerika.